

10

Ni oar ez omp, siouaz, pec'herien
 Hag en eur zougen drant ar groaz
 E kavimp en hor poan eun eien
 A beoc'h, a bardoun hag a c'hras.

11

Ho Mab war hent ar menez kalvar
 Ne lezas klemmaden ebet
 Ha c'houi, ken sioul en ho klac'har,
 Zo skouer an holl dud ankeniet.

12

Grit d'eomp eveldan hag eveldoc'h
 Kerzet kalounek war an hent
 Hor c'haso d'an eurusded, pelloc'h,
 En ho paradoz gant ar zent.

IMPRIMATUR :

Kemper, 30 a viz Gwengolo.


P. MESSENGER,

V. V.


Samatarium - Blaugonven
 de Gwervenan BN1-3-026

KANTIK D'AR WERC'HEZ VARI

EVIT KLANVDI GWERVENAN



O Gwerehez santel Mamm da




Je-zus, Grit euz zell ou-zomp ni ho




ped, Ha war ho ka-loun dru-ga-




re-zus Har-pit hor bu-hez trenk meur-



bet. O Mamm vat, di-rak ho



skeu-den Ho pu-ga-le 'neur ga-



.nan A deu d'o-ber d'eo'h eur



he-den E-vit-klanv-di Gwer-ve-nan.

1

O Gwerc'hez santel, Mamm da Jezus,
Grit eur zell ouzomp, ni ho ped,
Ha war ho kaloun trugarezus
Harpit hor buhez trenk meurhet.

DISKAN

*O Mamm vat, dirak ho skeuden
Ho pugale 'n eur ganañ
A deu d'ober d'eoc'h eur beden
Evit klanvdi Gwervenann.*

2

C'houi zo Mamm vat an holl gristenien
Hervez komz Jezus he-unan
Klevit eta mouez ar glanvourien
Bugale d'eoc'h, er Gwervenann.

3

Dinerzet siouaz! gant ar c'hlenved
O vaga terzien deiz ha noz
Ni zav hor c'haloun hag hor spered
Betek ho trôn er baradoz.

4

Er bed gwechall, dre ma tremene,
E welet Jezus o renta
Yec'hed d'ar c'horf evel d'an ene
D'an neb en doa fisians ennann.

5

Hirio 'n e c'hloar, ho Mab, hon Aotrou
Evel gwechall e Nazareth
Dre ho taouarn a skuilh e c'hrasou
Hag ous e Vamm a zent bepred.

6

Grit ma plijo d'an Holl-C'halloudek
Lakat hor yec'hed da wellaat
Gant ma vo d'eomp eun dra talvoudek
Bepred implijet d'ober vad.

7

Ni ray hor galloud, Mamm a druez,
Ma 'r bije rentet d'eomp eun deiz,
Da garet Doue 'pad hor buhez
Fidel d'e lezen ha d'hor feiz.

8

Ra vezo grêt, Rouanez karet,
Bolontez Doue dreist peb tra
Ni zoujo d'ezan 'n eur lavaret :
Doue 'ra mat ar pezh a ra !

9

Grêt en deus d'eomp, en e vadelez
Kaout feiz awalc'h, ha sklerijen
Evit kompren eo ar zantelez
Kenta tenzor ar gristenien.